

A.M.G.D.\*

**Da sant Per [Parrez Kerber] / À saint Pierre [Paroisse de Kerpert]**

Ton : Gwerz kozh sant Erwan. / Air : l'ancienne complainte de saint Yves



**Diskan :**

Aotrou sant Per, ni holl poaniet  
E-barzh kreiz trubuilhoù ar bed,  
Evit kerzhout war hent an Neñv  
Kreñvait, kreñvait, kreñvait hon feiz.

**Refrain :**

*Monsieur saint Pierre, nous tous affligés  
Au milieu des tourments du monde,  
Pour marcher sur le chemin du Ciel  
Affermissez, affermissez, affermissez notre foi.*

1 – Sant Per dre holl war an douar,  
'Zo meulet ha karget a c'hloar ;  
Gant e c'halloud meurbet brudet  
Pechoù Satan a vo trec'het.

*Saint Pierre partout sur la terre  
Est loué et rempli de gloire ;  
Par son pouvoir très réputé  
Les pièges de Satan sont vaincus.*

2- Jezuz a laras da sant Per :  
"Ma mignon, te 'zo pesketaer,  
Gant da rouejoù te 'dapo  
Eneoù evit an Neñvoù."

*Jésus dit à saint Pierre :  
"Mon ami, tu es pêcheur,  
Par tes filets tu prendras  
Des âmes pour les Cieux."*

3 – Neuze sant Per a lavaras :  
"Jezuz eo hemañ, hon mestr bras,  
Krouer an Neñv hag an douar,  
Deomp gantañ betek ar gloar.

*Alors saint Pierre dit :*  
*"Celui-ci est Jésus, notre grand Maître,*  
*Créateur du Ciel et de la terre,*  
*Allons avec Lui jusqu'à la gloire.*

4 – Gloar ar bed- mañ a zo dister  
 E-kichenn Jezuz ma salver ;  
 Jezuz hepken a c'hall reiñ din  
 An evurusted 'zo hep fin. "

*La gloire de ce monde est infime*  
*Comparée à Jésus mon Sauveur ;*  
*Jésus seul peut me donner*  
*Le bonheur qui n'a pas de fin. "*

5 – Hoc'h enor a zo bras meurbet,  
 Priñs evurus ar bastored :  
 Ar c'hentañ eus an ebestel,  
 Mignon Jezuz ho mestr santel.

*Votre honneur est très grand,*  
*Prince bienheureux des pasteurs :*  
*Le premier des apôtres,*  
*Ami de Jésus votre saint Maître.*

6 – Diazez an Iliz Doue,  
 An ifern bemnoz ha bemdez,  
 A zroug hag a gounnar karget  
 A ra deoc'h ur brezel kalet.

*Fondement de l'Église de Dieu,*  
*L'enfer chaque nuit et chaque jour*  
*De méchanceté et de rage rempli*  
*Vous fait une dure guerre.*

7 – Mes Jezuz en devoa laret :  
 "Kaer en devo an droug-spered,  
 War Ber ma Iliz me 'savo,  
 Per a vo trec'h d'an ifernioù."

*Mais Jésus avait dit :*  
*L'esprit mauvais aura beau faire,*  
*C'est sur Pierre que je bâtirai mon Église,*  
*Pierre triomphera des forces infernales."*

8 – Evit ano ho Mestr santel,  
 Dre-holl d'ar gaou e rit brezel,  
 Birviñ a ra ho kwad meurbed  
 'Vit gounit da Jezuz ar bed.

*Au nom de votre saint Maître,*  
*Partout vous faites la guerre au mensonge,*  
*Votre sang bout énormément*  
*Pour gagner le monde à Jésus.*

9 – 'Vit deskouez deoc'h hon c'harantez  
 Ni a zo holl ho pugale,  
 Gant ho sikour hag ho pennozh  
 Ni a yelo d'ar Baradoz.

*Pour vous montrer notre amour  
 Nous qui sommes tous vos enfants,  
 Avec votre aide et votre bénédiction  
 Nous irons au Paradis.*

10 – "Me ho kar a greiz ma c'halon,"  
 'Lare da Jezuz hon patron,  
 C'hwi da behini 'n 'eus kuzhet  
 Netra en Neñv na 'barzh ar bed.

*"Je vous aime de tout mon cœur,"  
 Disait à Jésus notre patron,  
 Vous à qui rien n'est caché  
 Au Ciel ni sur la terre.*

11 – Gwech-ha-gwechall 'pad ho puhez  
 Ho peus diskouezet kals a feiz  
 Evit Jezuz Krist ho Toue,  
 Hon Doue hag hon mestr ivez.

*De temps en temps au long de votre vie  
 Vous avez montré beaucoup de foi  
 Pour Jésus Christ votre Dieu,  
 Notre Dieu et aussi notre maître.*

12 – Diganeoc'h e c'houlomp ivez  
 Bremañ ha 'pad hon holl vuhez  
 Ar feiz hag ar garantez vras  
 'Reas deusoc'h ur sant ken bras,

*Nous vous demandons aussi  
 À présent et durant toute notre vie  
 La foi et la grande charité  
 Qui firent de vous un si grand saint,*

13 – Evit diskouez dimp pec'herien,  
 Ma meump bet ur mare anken,  
 Ar feiz-se en deus bet kollet  
 Mes kerkent en deus he c'havet.

*Pour nous montrer à nous, pécheurs,  
 Si nous avons eu un moment d'angoisse,  
 Cette foi qu'il avait perdue  
 Mais qu'aussitôt il avait retrouvée.*

14 – Me, kant ha kant gwech em buhez  
 Am eus torret lezenn Doue,  
 Mes pa sellan ouzh ma Fatron  
 Ar c'hoñfort a zeu em c'halon.

*Moi, cent et cent fois dans ma vie  
 J'ai trahi la loi de Dieu,  
 Mais quand je regarde mon Patron  
 La consolation vient en mon cœur.*

15 – Evel sant Per, hon Fatron mat,  
 Mar ofañsomp Doue hon Tad,  
 Ni a laro a greiz kalon :  
 Jezuz hon mestr : pardon, pardon !

*Comme saint Pierre, notre bon Patron,  
 Si nous offensons Dieu notre Père,  
 Nous dirons du fond du cœur :  
 Jésus notre Maître, pardon, pardon !*

16 – Aotrou sant Per, porzhier an Neñv,  
 Aotrou sant Per, mignon Doue,  
 Pedit start ar Werc'hez Vari  
 He Mab Jezuz d'hon fardoniñ.

*Monsieur saint Pierre, portier du Ciel,  
 Monsieur saint Pierre, ami de Dieu,  
 Priez fermement la Vierge Marie,  
 Que son Fils Jésus nous pardonne.*

17 – Dre ho pedenn nerzhus meurbet,  
 Goulennit digant Mestr ar bed  
 Ul lec'h evidomp 'barzh an Neñv  
 Da ganañ meuleudi Doue.

*Par votre prière très puissante,  
 Demandez au Maître du monde  
 Une place pour nous au Ciel  
 Pour chanter la louange de Dieu.*

**J.-M. TH.**

Imprimatur

Brioci, Die 4<sup>a</sup> Decembre 1902

M. Le Provost, vicaire général.

Gwengamp, mouler (*imprimeur*) EVEILLARD-BREBAN – 1902

**Nota** : \*A.M.G.D. : *Ad majorem gloriam Dei* / Pour la plus grande gloire de Dieu